

KINNIG-LABOUR
GRAFOUR · EZ / ENFRAMMER · EZ WEB

Deiziad kregiñ gant al labour : 17/01/2022

Kevrat: Kevrat termenet (4 miz) gant kendalc'h tebek war-zu ur gevrat didermen he fad ; 35 eurvezh/sizhun ; emglev a-stroll "ECLAT" (strollad C)

Lec'h labour : Gwened (Ti ar Vro Bro-Gwened) ha pellabour

Kasit hoc'h emstrivadur (CV + lizher emginnig e brezhoneg) da brezidant ar gevredigezh Mignoned ar Brezhoneg a-raok an 29/12/2021 dre bostel: contact@mignoned.bzh

AR GEVREDIGEZH "MIGNONED AR BREZHONEG"

E 2013 e oa bet krouet "Mignoned ar Brezhoneg". Ur gevredigezh hervez lezenn 1901 eo. Aozañ a ra :

- Ar festival GBB (Gouel Broadel ar Brezhoneg) bep eil bloaz.
- Ar raktres "Stal.bzh" : ul lec'hienn internet evit renablñ an embregerezhioù liammet gant ar brezhoneg hag ar voest ostilhoù evit broudañ an embregerezhioù da implij ar brezhoneg en o mont-en-dro.
- Pourchasoù : kehentiñ, stummadurioù, krouiñ ha gwerzhañ produioù, darvoudoù e brezhoneg.
- Prantadoù kehentiñ evit ar c'helenn divyezhek brezhoneg-galleg.

DESKRIVADUR AR POST

Kemer e karg al lodenn skeudennaouiñ, kehentiñ gweled ha lodenn diorren web (WordPress) ar gevredigezh.

KEFRIDIOÙ :

❖ KOULZAD KEHENTIÑ KELENN DIVYEZHEK

- sevel ar skorioù kehentiñ *print* (skritelloù, plegfollennoù, h.a. h.a.)
- sturiañ ha lakaat da emdreiñ lec'hienn internet porched kehentiñ : ecole.bzh
- sevel ar skeudennoù evit ar rouedadoù sokial
- sevel videoioù berr bevaat, GIF fiñvet evit ar rouedadoù sokial e liamm gant ar c'houlzad
- ober war-dro al lojistik evit kas an dafar kehentiñ d'ar rouedadoù deskadurezh ha d'ar strollegezhioù lec'hel

❖ FESTIVAL GBB

- sevel kehentiñ gweled ar festival en ur vont e darempred, diouzh an ezhommoù, gant ur grafour ez diavaez (evit ar skritell hag ar garta c'hrafek)
- sevel ar skorioù kehentiñ evit ar rouedadoù sokial ha kehentiñ moulet ar festival
- merañ ha lakaat da emdreiñ lec'hienn ar festival : gbb.bzh
- sturiañ lodenn kinklañ ar festival

❖ MEIZEREZH GRAFIKEL HA DIORREN WEB

- sevel ar skeudennaouiñ, ar skorioù kehentiñ moulet, an identelezh-gweled evit obererezhioù all ar gevredigezh (stummadurioù, darvoudoù, pourchasoù evit pratikoù diavaez)
- merañ boutik enlinenn ar gevredigezh : boutik.mignoned.bzh
- meizañ grafikel evit produioù nevez e brezhoneg
- merañ ha lakaat da emdreiñ lec'hienn ensavadurel ar gevredigezh : mignoned.bzh

DOARE DEN HA BARREGEZHIOU GORTOZET :

- Diplom : live IV (Bachelouriezh)
- Aotre bleniañ : Aotre B
- Live brezhoneg : Komzet ha skrivet
- Mestroniañ pack Adobe ha WordPress

CHEMET HA DOARE-BEZAÑ:

- Aozet mat, barrek da gas raktresoù
- Emrenerezh, intrudu
- Perzhioù daremprediñ, kenlabour gant gopradez hag izili burev ar gevredigezh

OFFRE D'EMPLOI
GRAPHISTE / INTEGRATEUR · TRICE WEB

Date de prise de poste : 17/01/2022

Contrat: CDD de 4 mois avec perspective de CDI ; 35 heures/semaine; convention collective ECLAT (groupe C)

Lieu d'exercice : Ti ar Vro à Vannes et télétravail

Merci d'adresser votre candidature (CV + lettre de motivation rédigée en breton) au président de l'association au plus tard le 29/12/2021, à l'adresse : contact@mignoned.bzh

L'ASSOCIATION "MIGNONED AR BREZHONEG"

"Mignoned ar Brezhoneg" est un outil au service de la langue bretonne. L'association :

- Organise le festival GBB (Gouel Broadel ar Brezhoneg) tous les 2 ans ;
- Développe le projet "Stal.bzh", un site de référencement des entreprises liées à la langue bretonne et une boîte à outils visant à inciter les entreprises à utiliser la langue bretonne ;
- Pilote la campagne de communication annuelle pour l'enseignement bilingue en Bretagne ;
- Propose différentes prestations : communication, formations, événementiel et produits en breton.

DESCRIPTION GÉNÉRALE DU POSTE

Vous prenez en charge la partie graphisme, communication visuelle de l'association et gérez, développez et faites évoluer les sites web de l'association (tous sur WordPress).

MISSIONS :

- ❖ **CAMPAGNE DE COMMUNICATION ENSEIGNEMENT BILINGUE**
 - réaliser les différents supports de communication *print* (affiches, dépliants, etc.)
 - piloter et faire évoluer le site internet, portail de la communication ecole.bzh
 - réaliser les contenus visuels pour les réseaux sociaux
 - réalisation de vidéos courtes d'animation, GIF animé pour réseaux sociaux en lien avec la campagne
 - assurer la logistique de la livraison du matériel de communication pour les réseaux d'enseignement et collectivités locales
- ❖ **FESTIVAL GBB**
 - réaliser la communication visuelle du festival en lien éventuel avec un · e graphiste extérieur · e (affiche du festival et charte graphique)
 - réaliser les supports visuels pour les réseaux sociaux et la communication visuelle du festival
 - administrer et faire évoluer le site du festival gbb.bzh
 - piloter la partie décoration du festival
- ❖ **CONCEPTION GRAPHIQUE ET DÉVELOPPEMENT WEB**
 - réaliser les supports de communication visuelle, éléments visuels de communication pour les autres domaines d'activités de l'association (formations, événementiel, prestations auprès de clients extérieurs)
 - gérer et administrer le site marchand de l'association : boutik.mignoned.bzh
 - conception graphique pour des nouveaux produits en langue bretonne
 - administrer et faire évoluer le site institutionnel de l'association : mignoned.bzh

PROFIL ET COMPÉTENCES ATTENDUES :

- Diplôme : niveau IV (Baccalauréat)
- Permis de conduire : Permis B
- Niveau de breton : Parlé et écrit
- Maîtrise des outils de communication visuelle et de gestion de site internet (pack Adobe, WordPress..)

SAVOIR-FAIRE ET SAVOIR-ÊTRE :

- Organisé · e et capacité à conduire des projets
- Autonomie et initiative
- Qualités relationnelles, collaboration avec la salariée et les membres du bureau de l'association